



OBEREREZH 1 : KÊRIEKADUR AR BED

Kudennadur : Penaos e ro kêriekadur ar bed ur rol brasoc'h-brasañ d'ar c'hêrioù er bedeladur ?

Urzh-labour: Sellit doc'h ar c'hartennoù en dorn-levr **pajennoù 24-25** ha lennit mat alc'hwez pep hini.

Respontit d'ar goulennoù a-benn klokaat ar gentel-greizsek.

1. E-barzh peseurt spasoù e vev al lodenn vrasañ eus ar boblañs er c'hêrioù? Implijit ar skeulioù kevandirel, rannvroel pe broadel. _____

2. peseurt kevandir en deus an nebeutañ a boblañs kêr? _____

3. Peseurt kevandir a vod ar muiañ niver a vetropolennoù er bed?

4. Klokait an daolenn get ar respont vat :

Ar metropolennoù kresket kenañ hiziv
zo lec'hiet

Ar metropolennoù kresket nebeutoc'h
zo lec'hiet dreist-holl

6 metropolenn àr 8 get muioc'h evit 20
million a dud zo lec'hiet



E Azia

E Azia hag e Afrika

Er broioù diorret

Ar pezh em eus komprenet:

Barrennit ar respont fall evit pep frazenn.

- En Azia hag en Afrika (broioù àr ziorren), ar boblañs kêr a gresk / a zigresk.
- En Europa hag en Amerika (broioù diorret), ar boblañs kêr zo an hini niverusañ / an hini nebeutañ.
- Er bed, muioc'h evit an hanter eus ar boblañs a vev e kêr. Kreskiñ a ra ar sifr-mañ, e broioù zo edan efed ar c'hresk demografel (kalz a c'hanedigezhioù) hag ar Fed e ya kuit an dud eus ar c'hêrioù er maezioù / eus ar maezioù d'ar c'hêrioù (=diavaeziñ, dududiñ diwar ar maezioù).

5. Notennit termenadur ar **gêr ved** (pajenn 38) hag ar **metropoladur** (= **meurgêrieka**at pajenn 49) er gentel – greizek hag adlennit anezhe.

6. En daolenn edan, prout eo Tokyo a respont d'an termenadur **kêr bedel** get sikour ar steuñv pajenn 36 diell 2 ha pajenn 39 diell 7

Petra a ziskouez ...

Lec'hioù / savadurioù ?

Gourc'hemenn (=kefridi=rol) politikel
Tokyo Diell 2 ha 3 p 36

Gourc'hemenn sevenadurel Tokyo

Diell 1 ha 2

Gourc'hemenn ekonomikel ha finañs
Tokyo Diell 2 betek 4

Tokyo ur vetropolenn **enframmet**
mat er bed (trañsportoù) pajennoù
38-39

1. Us-linennit ar gwellañ frazenn evit termeniñ ar ger: metropoladur:

- Sachiñ a ra ar c'hêrioù an dud, an embregerezhioù bras (FTN= pajenn 38) hag al lec'hioù politikel.
- Sachiñ a ra ar c'hêrioù dreist-holl an obererezhioù dudioù hag an douristed.

1. Menegit daou sifr a justifi ho choazoù get sikour sifroù-alc'hwez.



OBEREREZH 2 : SPASOÙ HAG ARDREMEZIOÙ

Kudennadur : Petra eo dezverkoù an div vetropolenn Los Angeles ha Lagos ?

Urzh-labour : klokait ar c'huzulioù roet deoc'h evit klokaat al lodenn 2 eus ar gentel-greizek.

1) Menegiñ a ran ar spasoù kêr :

« Kelc'hiet eo ar c'hreizennoù-kêr get kurunennoù kêriekaaet evel ar bannlevioù ha pelloc'h c'hoazh ar spasoù trokêrel (an trowardroioù). **En em ledañ** a ra an annez met ivez an aveadurioù (=26) dezougenoù, lojistik, servijoù, touristelezh, ha dudioù. »

Michel Lussault, *L'avènement du monde*, Le Seuil, 2013

1. Is-lennit an daou spas kêr
2. Displegit ar ger e druz.

2) En em lec'hiañ a ran er spas

Klokait an daolenn get sikour ar gartenn pajenn 24.

	Lagos	Los Angeles
kevandir		
bro		
Live diorren (IDH) uhel / izel		

3) Sellit mat doc'h an ardremezioù kêr àr ar vignetennoù.

Kerzhit da glask ur c'hoari vignetennoù ha sellit mat doc'h ar skeudennoù.

- N'o deus ket ar div gêr ved ar memes live diorren , newazh, o deus ardremezioù boutin.
- Strollit ar skeudennoù a ziskouez ar memes ardremezioù. Diwallit ez eus skeudennoù disheñvel.
- Kavit an anv (**vignetennoù gwer**) ha gourc'hemenn (**vignetennoù ruz**) al lec'hioù-se. .
- Klokait an daolenn é notenniñ anv an ardremezioù boutin eus an 2 gêr ved e gwer hag ar gourc'hemenn e ruz.
- Skeudennoù zo zo disheñvel, kavit anv an ardremezioù (gwer) hag ar gourc'hemenn (ruz) hag ad-lakait anezhe en daolenn.

	Lagos	Los Angeles
Ardremezioù boutin ha gourc'hemenn		
Ardremezioù disheñvel ha gourc'hemenn		

- Testeniañ a ra an ardremezioù Lagos eus diforc'hioù etre an dud . Pere?